

— 264 —

## SOÑNEN ER PLAH ÉRED

*Chetu er soñnen e larér hoah é meur a gornad a pe ia en dud  
doh taul arlerh en overen éred. Er gaseréz hé lar el liésan. Ur  
mod kaer de ganderhel. En ton ag er soñnen-men e zou unan  
ag er ré kaeran e fehé bout kavet.*

Allégro

En dud iou ank pe zi mé ant ne houiant  
ket pe tra e hrant En dud iou ank  
pe zi mé ant ne houiant ket pe tra e  
hrant A - dieu ka me ra de zig  
A - dieu aveit ja - més A - dieu ka  
me ra de zig A - dieu aveit ja - més

I

En dud iouank pe ziméant  
Ne houiant ket petra e hrant.

DISKAN

*Adieu kamaradézig  
Adieu aveit jamés.*

— 265 —

## II

En dud iouank e chonj geté  
É koéh en eur a veg er gué;

## III

É koéh en eur a veg er gué;  
E vé en dél milén e vé!

## IV

En del milén e goéh d'en ias  
Kalon er plah e huanadas.

## V

Me chonjé ur huéh diméet  
N'em behé groeit nitra erbet.

## VI

Meit bremen é huélan erhat  
E ma ret d'en mé labourat.

## VII

Monet d'er park ag er getan  
Chomel abarh en devéhan

## VIII

E ma ret d'en mé labourat  
Ha memb andur meur a vahad.

## IX

Ha memb andur meur a vahad  
Néein diù pé ter guerhedad.

## X

Néein diù pé ter guerhedad.  
Ha get beg me zroed luchennat.

## XI

E ma ret d'en gobér ohpen  
Monet get el lienneu d'el len.

## XII

Monet get el lienneu d'el len  
Hag ou hannein hag ou disten.

## XIII

Dezir ha karein e zou ret  
Monet d'er fetan hemb séhed.

## XIV

Lein er mañné p'oën arriuet  
Ar vord en hent 'm boé azéet.

## XV

Ar vord en hent 'm boé azéet  
Ha men dareu en doé ridet.

(Dastumet)

Hui hag e hel, prènet rah el livreu neuë mollet  
é brehoneg, aveit rein kalon d'er rè e labour aveit  
Breih (Bretagne).

\*\*

Lén DIHUNAMB b̄ep miz.e zou mat; klah ar un  
dro lénerion neuë dehi e zou guel.